

ME ZO KOKO DEUS AR PORZH-GWENN !

Esmae a oa en noz all war blasenn an ti-kêr en Trevoù. Anv a oa eus daou den bet er Rezistañs : unan war an dachenn, François Kerambrun, bet er Rouedad Shelburn, hag egile Jarl-Mari Guillois, bet mouezh vrezhoneg ar Jeneral de Gaulle e Londrez. Kement hag enoriñ anezhe e oa bet dreset bannieloù triliv ha bannieloù gwenn-ha-du dirak monumant ar re varv. Ul lid kaer ma zo bet ul lennadenn gaer a-berzh an aotrou Joseph Laurans eus galv ar Jeneral troet en brezhoneg gant Jarl-Mari Guillois.

Evel ma skrivfe Jarl Priel, ur pikol levr a c'hallfemp skrivañ diwar-benn buhezioù hag avañturioù Jarl-Mari Guillois. Deut er bed er Porzh-Gwenn e 1910 hag aet da anaon e 1994, er Porzh-Gwenn iveau, met aet a-hed hag a-dreuz abalamour d'ar brezel, ha dibabet chom en Londrez un hanterkant vloaz bennaket.

En bourzh ar Vauquois, un avizo, en devoa kuitaet porzh Brest d'an 18 a viz even 1940, e oa. Kalz martoloded a oa bet lazhet pe beuzet pan oa bet lakaet an avizo da darzhañ gant ur min alaman, ha kement-mañ en Kanol-ar-Forn a-vaez da Gonk-Leon : ouzhpenn 130 den lazhet pe gollet, hag un dek den bennak manet bev. En touez ar re-mañoù e oa Jarl-Mari Guillois.

Diwar se e oa aet war-eeun da Londrez o tont gant an FFL. Goût a reer e oa en em gavet gant Jean Marin, anv stourm Yves Morvan, ur paotr eus Douarnenez. Hemañ, un doare Yann Martolod, en devoa merket penaos e oa eus Jarl-Mari Guillois ur brezhoneger ampart ha leun a intrudu da geñver an dud en-dro dezhañ : kinnig dezhañ bezañ blenier gwetur ar Jeneral de Gaulle – ar pezh a voe evit ur sizhun bennak, hervez. Met, dreist pep tra, e c'houlennas gantañ lenn en brezhoneg kemenn brudet ar Jeneral de Gaulle.

N'eus ket a roud enrollet eus galv ar Jeneral diwar hini an 18. Ur galv all a voe, un nebeud devezhioù goude, gant ur skrid disheñvelik. Moarvat eo ar skrid-se a oa bet troet ha lennet gant Jarl-Mari. Ha n'hon eus roud ebet anezhañ kennebeut.

Pebezh tonkad : dont a-benn da skarzhañ diouzh ur vag aet da arched houarn, hag en em gavout un nebeud devezhioù war-lerc'h dirak ur mikro brezhoneg dalc'het gant ar BBC ha broudañ e genvrodi da sevel a-enep an Alamanted... ha tud Vichy.

Aet an darvoudouù war-raok, o tremen buan, primoc'h evit na soñjer... A-raok ar galv e oa deut ar c'helou eus peñse ar Vauquois betek divskouarn tud Perwenan, hag evel-just e penn skouarn mamm Jarl-Mari. An istor, diwar neuze, a gemer lañs ha da vat. Mamm Jarl-Mari he devoa goulennet gant person ar barrouz ober war-dro ul lid dre ma oa bet kollet he mab er mor. Krog an traoù da vezañ aozet ha sede Jarl-Mari, eus Londrez, o tistagañ galv ar Jeneral en brezhoneg. Hag er fin d'e lennadenn da läret : « Me zo Koko deus ar Porzh-Gwenn ! ». Ar fin-se, klevet gant an Itron an Du, er Porzh-Gwenn, zo kaset ganti da vamm Jarl-Mari : « Bev ho mab ! Klevet 'm eus Koko er post ! ». Frealzet ar vamm, sklaer eo, en un doare dic'hortoz ! Ur ger a chomo en istor hag a lakao ar Porzh-Gwenn da lec'h mojennel ur wezh ouzhpenn.

Jarl-Mari a dalc'ho da stourm en bourzh ar Savorgan-de-Brazza, un avizo all, en tu d'an Afrik.

« Koko » a deuio en-dro d'ar gêr, met en Londrez evit un toullad kaer a vloavezhiou, evel am eus skrivet uheloc'h.

An istor a lavar iveau en devoa Jarl-Mari, goude trubuilhoù ruz ar brezel, goulennet gant ar Jeneral, deut e penn an traoù en Bro-C'hall, kaout justis evit hon yezh hag evit ar vrezhonegerien. Reiñ ur statud d'ar brezhoneg. Ne oa ket gwall dra en skoaz ar stourm bet renet gant Jarl-Mari hag e gamaraded hag e gamaradezed. Divinit petore respont a oa bet roet dezhañ ? Evel kustum, siwazh. Sede e oa bet Koko deus ar Porzh-Gwenn kaset da vale.

Ha Koko, a vo lavaret. Eus pelec'h e teu an anv-se ? Kement testeni a gont penaos e oa an anv-se roet da Jarl-Mari pan oa bihan, ha miret gantañ war-lerc'h. Ha just a-walc'h eo unan eus ar gerioù a glever ar muiañ er biojoù evit cherisañ ar re vunut. Na pet gwezh em boa klevet ar ger-se pan oan un tamm mat munutoc'h evit herie ! « Sell'ta koko ! », « Hemañ zo koko bihan ! », « Petra'oa koko bihan ? », hag all, hag all. Tenerausoc'h a se an anv pan oa bet klevet er post bihan e miz gouere 1940, goude galv ar Jeneral. Ur vro a-bezh a oa en ennañ.

(Trugarez da : an Itron Guillois, merc'hed François Kerambrun, Lucien Anquet, Eric Vanderheden, Joseph Laurans, Janine Troiadec, Pierre Adam., Jerom Coat Savidan, ha da dud all am eus ankouaet, sur a-walc'h)

Herve Bihan

Levrلنнадур

Jerom Coat Savidan, Ar galv e brezhoneg, petore tonkad – Ar brezhoneg implijet war ar BBC hag e Londrez, 1940-1944, Memor Master, Skol-veur Roazhon 2, 2022-2023.

Lec'hiennoù

De Gaulle o lenn e c'halv (an eil) d'an 22 a viz even 1940 : <https://fresques.ina.fr/de-gaulle/fiche-media/Gaulle00300/appel-du-22-juin-1940.html>

Pennad gant Bernez Rouz : <http://www.tresor-breton.bzh/2023/06/18/18-juin-18940/>

Diwar-benn ar galv e brezhoneg gant Jarl-Mari Guillois :

https://br.wikipedia.org/wiki/Galv_an_18_a_viz_Mezheven

Devezh lid en Trevoù (24 a viz even 2024) :

https://trevou-treguignec.bzh/petit-temps-de-recueillement-lundi-a-18h15-30-au-monument-aux-morts-lecture-en-breton-et-en-francais-du-message-de-general-de-gaulle/?utm_source=mailpoet&utm_medium=email&utm_campaign=keleier-an-treou-nouvelles-de-trevou-treguignec-n308-le-17-12-2021-sem-50_122

Rouedad Shelburn Gwengamp (François Kerambrun) :

https://actu.fr/bretagne/guingamp_22070/reseau-shelburn-livre-hommage-resistants-guingamp-de-plouha_28711580.html

Jarl-Mari Guillois, pennad war Le Point : https://www.lepoint.fr/histoire/charles-marie-guillois-la-voix-bretonne-de-la-resistance-27-05-2014-1828176_1615.php#11

Jarl-Mari Guillois : <https://www.francaislibres.net/liste/fiche.php?index=72875>